



CANTIC SPIRITUEL

En enor da Sant Ian Badezour :

Var un ton nevez.

JESUS Map d'an Tad Eternel,
 Salver ar bed universal,
 Roit din ho craç hac ho ficour
 Da gonts a Sant Ian Badezour.

Zachari hac Elizabeth
 Voa e Dat hac e Vam hanvet
 D'an den voant exant a bep blam
 Pa voant da Sant Ian Tat ha Mami

Elizabeth a voa coz bras,
 Hep beza bet buguel biscoas,
 Mæs dre ur c'hraç dreist an Tatus
 E concevas he C'hraouadur. *mat*

E guir Priedou e vevent,
 Humbl voant ha parfet evel Sant;
 Bemde e suplient Doue
 Ma roje deze bugale.

Pa voa Zachari en Ilis
 O offr da Zoue ar Sacrifiç,
 E tugaças Doue an Tat
 Un AËl dezàn gant quelou mat.

Ebars en tu deou d'an Auter,
 E tisquennas ar Messenger,
 Hac e laras da Zachari,
 Ema graç Doue en ho ty.

Exaucet eo bet ho peden,
 Doue o ra deoc'h ho coulen;
 Ho Priet, quent nemeur ahan,
 En devo ur Map hanvet Ian.

Ar Map-ze a vo ur Sant bras,
 Ur Precurseur d'ar Messias:
 Ar c'hraç en devo da velet,
 Nep a dle redimat ar bet.

Gabriel a zispariffas,
 Elizabeth a goncevas
 Ur Map etre he daou goste,
 Precurseur d'an Autrou-Doue.

Pa voa Santes Elisabeth
 O tóuguen Sant Ian biniguet,
 E teuas ar Verc'hes Vari
 Evit renta bifer dezi.

Mari a zougue d'ar c'houlz-ze
 En e Entrailloù Map Doue;
 Deut voa abers ar Speret-Glan,
 Da lemel ar pec'her a boan.

P'en devoa Mari saludet
 He C'hiniter Elizabeth,
 Ha discuet dezi ur joa bras
 Daou marac'h caer a c'hoarvezas.

Mirac

Sant Ian e Cof³ Elizabeth.
Gant joa a commanças, lamet
Evel pa vise d'an daoulin
Da saludi he Vestr Divin.

Ouspen e voa sanctifier,
Delivret demeus ar pec'het,
A ro deomp hon Tat hac hor Mam,
Balamour d'ar pec'het Adam.

Piou ne gompreno quet ahan
An excellanç eus a Sant Ian,
Grêt voa gant Doue ur Sant bras,
Hac èn ne voa quet ganet c'hoas.

Pebes joa da Elizabeth;
Pa c'hanas he Map biniguët:
Cavet Jesus en e c'hichen,
Redempteur an natur humen.

N'em eus nep douët evit avanç
E voa en Eê rejouissanç,
Hac e cane an oll Ælez
Da Sant Ian Canticou nevez.

Pa zeo Jesus Roue a c'hloar
Deut eus an Eê var an douar,
A zisquese dre e bresanç
Cals demeus a rejouissanç.

Zachari a voa mut rentet
Balamour m'en devoa doueter
Da gomsou an Æl Gabriel
Messager an Tad Eternel.

Mæs Sant Ian pa zeo bet ganet ;
 Ar goms d'e Dat en devez roet :
 Rac chetu aman e gomzou
 Ian emezàn eo e hano.

Entre ar Bugale malet
 So biscoas gant groaguez ganet
 N'en deus quet bet hepquen unan
 Brassoc'h evit ma zeo Sant Ian.

Jesus-Christ pa voa var ar bet
 Eo en devez e lavaret ,
 Me gred, hor Salver pa gomzo
 A vezo credet hep testou.

Sant Ian biscoas ne ras pec'het ,
 Ha ras pinigen bras bepret ;
 Paourte, poan, humilite,
 N'en deus bet quen en e vuhe.

N'en devoa quen evit dillat
 Nemet croc'hennic un danvat
 E diliciussa cheriou
 Voa dour scler ha griziou lousou.

E vele voa an douar yen ,
 E dy er meas, e bluec men,
 E dapis hac e lincelliou
 Ne voant nemet spoe ha delliou.

E gompagnunez al loenet,
 Bleizi, Moc'h gouez ha Leonet,
 E jardinou d'en em bourmen,
 Coajou, drez, spern, dour ha bouillen.

5
Concluomp eta, Christineen,
Eo neccesser bras ar binigen,
Pa zeo un den quen innoçant
A souffr quement-all a dourmant.

Sant Ian en desert er guis-ze
Ne re nemet pidi Doue,
Ha gortos gant un desir bras
Donediguez ar Messias.

Mæs pa voa arru an termen
Da brena an natur humen,
E quittas Sant Ian ar c'noajou
Evit mont da sermon dre'r vro.

Da laret d'an dut disordren
E voa ret ober pinigen
Evit prepari an heachou
Da ziguemeret an Autrou.

Ar brut mat demeus e vuhe,
E squiant, e autorite,
A re d'an dut a bep canton
Donet d'e glevet o farmon.

E fellou a voa quer charmant,
Quen douç e goms, quent ravissant,
Ma songent oll bian ha bras
Penaus voa èn ar Messias.

Bete memes ar Jusevien
A zeputas o Beleyen,
Evit mont da c'houlen ountan
Hac ar C'hist a rer anezàn?

Mæs èn en deveus respontet
 Ne voa na Christ, nag ur Prophet,
 Nemet ur vouez en ur dremen
 O laret ober pinigen.

Sant Ian eleac'h ma tremene
 Ouspén farmon e vadeze;
 Gant e gomzou e yent contant
 Da fench ha caout badiziant.

Pa voa o farmon evellen
 E quichen bort rivier Jourden,
 E teuas Jesus e hunan
 Da veza badezet gant Ian.

Sant Ian en instant m'er guelas
 Ous e anaout en discuefas,
 Heman, emezàn, eo an Oan
 A lammo ar pec'her a boan.

En so bet deomp prometet
 Gant quement eus a Prophedet:
 Chetu amàn an Oan Doue:
 Hor Mæstr, hor C'hrouer, hon Roue.

Piou a gomprennas biscoas
 Humilite ar Messias,
 Pa bligeas gantàn er Jourden,
 Monet e renq ar bec'herien.

Da effaci ar pec'hejou
 E ve grêt ar Badianchou,
 Mæs Jesus, hac èn innoçant,
 A recevas ar Badiziant.

Chetu amàn traou surprénant
 Hac a ra din coll ar parlant,
 Guelet Jesus humiliet
 Dirac nep en devoa crouet.

Jesus hor Mæstr, Roue a c'hloar,
 A so prosternet d'an douar;
 Mæs Ian o rei ar Badiziant,
 So enoret evel ur Sant.

Jesus a so voar e zaoulin,
 Hac èn ur Personaich Divin,
 Jesus a so e plaç ar peçher,
 Ha Ian so e plaç hor Salver.

Chui Sant Ian p'ho poe an enor
 Da badein hon Redemptor,
 A remerquas a c'uh e benn
 Ar Speret-Santel o risquenn.

C'hui glevas an Tad Eternel,
 O ansao eno e Vuguel:
 Hennez eo ma Map, emezàn,
 Ma figeadur a so ennàn.

Sant Ian p'en devoa badezet
 Jesus hor Salver biniguet,
 A yas da Balæs Herodes,
 D'e vlam eus e aoultries.

Mæs ar Roue Herodias,
 Ous Sant Ian en em goleras,
 Hac a ras dre suasion
 Lacat anezàn er prison.

Pa voa ar Roue un devez
 O leina e compagnunez,
 E teuas Merc'h ar plac'h Flamant
 Da ober un dans dirazàn.

Ar Roue neuse a laras
 D'ar Verc'h-ze da Herodias,
 Goulen un dra bennac ountàn
 Hacc di vize anezàn.

Gant he Mam ar plac'h quelennet
 Penn Sant Ian e deus goulennet:
 Troc'het voe er prison e benn,
 Ha roet dezi he goulen.

Sant Ian bremàn ez oc'h er gloar
 Goude ho poan var an douar:
 Hoc'h assistanç a c'houlennomp,
 Ho pezet fonch eus a c'hinomp.

Hor preservit ous teir goalen,
 Bresel, quernez hac ar vocen,
 Dre ho pedennou deiz ha nos
 Hor c'hunduet d'ar Barados.

F I N.